

EUN TAM FLIPAD D'AR REPUBLIKANED

473

I

Disul genta hervez ar vrud, 'vo adarre votadek,
War-ze n'hallan ket bezan mud, Breton on ha kalonek.
Ret eo din d'an oll lavaret ar pez zo war ma c'halon,
Fianz a meuz a vezo kals hag a laro vin gwirion.

II

Na neuz ket c'hoaz forz pell-amzer, ar vretoned oa zellet
Evel tud leal a galon, diez da veza gwerzet;
Boe mê deut ar c'hrak-vourc'hijen, ar barbichenno da rên,
Meur a vreizad 'zo bastardet, na nint ken henvel ouz den.

III

Etrezoc'h, Republikaned, hervez bombanz ho komzo,
Na glasket nemert rei d'ar vro frankiz ha *liberteo*;
Ha! na ret ket ar liberte d'ar re all d'en n'em difen:
Koulskoude ganeoc'h treitouraj, zo kemeret 'vit lezen.

IV

Eur stum vrao ho c'heuz digaset d'ober *Electiono* :
Mouez ann den pinvik 've tapet enn dilostad eur friko :
D'ar *paizant* paour 've stlapet eur chopinad n'he c'heno,
Eur *billet* n'he zorn 've laket, neuze kaset d'ar *Buro*.

V

Preparet 'ta ho chopino, war-ben disul, ostijen;
Hag, euz ar rêt evit asten, badeet o pariken,
Rak pephini 'renko kavout he vannac'hik da lipad,
Ha neubeut a ielo d'ar gêr, war ho daou zroad plantet mad.

VI

Ia, gand deio ar votadek e zeo eur vez vraz gwelet
Ann darn vrasa demeuz an dud gant ar venti kollet,
Lonka a reont eur c'horfad, war ar c'horfad-ze, guevier,
Rak enn deiz-se enn pep parouz a ve *doktored* deuz koer.

VII

Setu azè eur wirione, enn berr gomzo lavaret
 Gand deizio ar votadeier, n'hon bro 've amprefanet;
 Distoladenno demuez kœr, tort ha kam, tud difeson,
 'Deu da brezek ho aviel : neo ket hini ar person.

VIII

Nan, nan, gante ar veleien na nint tam 'bet espernet,
 C'hoant a deuz 've ho genoio gant eun alc'houe ziellet,
 Evite eur belek na dle bean na'vit gwen na du,
 Mœz hi'livo e zoudanen, eun deiz, mar gallont, enn *Ru*.

IX

Goude ar belek, ar Roue, hag oll dud jentil ar vro,
 Na voint ket gante espernet, na dre skrid, na dre gomzo;
 • Mar deu *Kerjegu* da dremen, ho frio deoc'h vo troc'het,
 • 'Vit vet kaset oll da beuri d'ar parko gant ar loened. •

X

Na zonjan ket e vefe den hag a gredfe ar gaou-ze,
 Re dioez e c'heo da lonka, gwelet rer lost ar loue.
 Ha neuze, Republikaned, ha tammo krak-bourc'hizien,
 Neo ket dindannoc'h 've euruz, enn amzer-ma mœrrerien.

XI

Lezet 'ta, tud diwar ar mœz, gand kœriz ho c'huzulio,
 Goud a red'renker pervuan, pœan kêr ho c'halio,
 Silaouet mouez ho konsianz, bêet tud leal ha gwirion :
 Ha difennet a greiz kalon, ho fe, ho Religion.

FANCH HIRR-LANCHEN.

Propriété.